



KEMENNADURIOÙ ADALEK MIZ GOUERE ?

MACRON A GERZH WAR AR PARLAMANT HA KOD AL LABOUR

DALC'HOMP PENN !

Abalamour da betra e vijee dleet deomp leuskel amzer da vMacron ? Na c'hortozer ket pa vez kaoz eus distruj ar postoù-labour hag ar goproù, evit ar re vresk pe dilabour ,evit ar re hep lojeiz pe dibaper...Muioc'h evit biskoazh ez eomp « war vale » war_du an diskar sokial ! Petra zo kaoz e vije dleet deomp gortoz hep ober mann ebet ? Petra zo kaoz e vije ret lezel ar plas d'an tu-dehoù pellañ ?

Gwir eo eo bet dilennet Macron enep da Le Pen, met evit an dro gentañ gant e brogramen doa dastumet 8 528 585 mouezh war un hollad a 35 737 724 a dud bet o votiñ. Ar program ? Nebeutoc'h a parlamant,nebeutoc'h c'hoazh a bouez gant dezveg al labour, muioc'h a Uber hag a vreskted. Pres zo war Macron setu ma ra gant prosezadur ar c'hemennadurioù. Petra zo e scenario ar gemennadur gentañ ?

Pep tra zo prest evit miz Gouere. Petra zo e-barzh ?

- 1- Astenn ar brioriezh d'an emglevioù dre embregerezh . Lezenn El Khomri (diwar-benn al labour) a roe an aotre d'en ober evit hirder an amzer labour. An implij, ar goproù hag an aozioù labour a vo en emglevioù ivez.
- 2-Kendeuzet e vo ensavadurioù dileuriañ an implijidi (KE, DI, PYSAL)
- 3-An dic'haouioù e kenkaz e vezer ezfredet en un doare nann reizh a vo stanket d'ur serten live. Un taol fall eo evit lezvarn ar Prud'hommes, ur prof eo a-benn reiñ an tu d'an implijerien da skarzhañ prim al labourien.

Peseurt mod e vo graet gant al lezenn engwiriadur evit ren dre gemennadurioù ?

- 1-Ober vann da gaout un eskemm sokial gant ar sindikadoù
- 2-Ha goude se e c'hello ar gouarnamant embann ur gemennadur. Engwiriet e rank bezañ gant ar parlamant hervez mellad 38 ar vonreizh. Lakaet da reolennoù ez eo ar c'hemennadurioù a vo talvoudus kerkent a beurwiriekaet gant ar parlamant.

Petra zo kaoz e fell d'an talbenn sokial sevel ur stourm gant an holl,gant ar muiañ a dud posubl ? Abalamour da betra e rankfe ar pal se bezañ un doare da lakaat an holl sindikadoù da labourat asambles ? Pouezus meurbet eo ar gemennadur gentañ. Ma c'hell Macron ober al lezenn evel ma karo ez ay betek penn o tiskar ar gounidoù sokial bet tapet dre ar stourmoù sokial hag ar c'henskoazell. Hag e-keit se eo laouen tre ar MEDEF/EAEG. Galv diazez an talbenn sokial a oa e bal kenderc'hel gant ar stourm enep d'al lezenn labour ha d'ar waskerezh , ha setu amañ e-barzh ar vro e c'halvomp hiziv an deiz :

D'EN EM VODañ D'AL LUN 19 A VIZ EVEN DA 6E NOZ DIRAK TI-KÊR GWENGAMP.

Kinnig a reomp da aozañ ar stourm o klask lieskementiñ ar c'hengerc'hioù , an doareoù stourm, ar bodadegoù, ar manifestadegoù, hep ankouaat an emvodoù-meur en embregerezhioù ha er melestradurezhioù.Pres zo warnomp, dav eo en em aozañ en un doare lec'hel e pep lec'h ma c'heller sevel ur c'heñver-nerzh. Deus un tu all e faot deomp adlâret e nac'homp ar gwask direizh a zo bet hag a bad , setu ma c'houlennomp ma vo distaoliaet an 2000 den bennak bet barnet ha kondaonet evit o stourm enep al lezenn labour ha lezet da vont diouzhtu ar Roazhoniz zo toullbac'het c'hoazh.

Sinet gant UL CGT Gwengamp, Solidaires Gwengamp, CNT 22,France Insoumise Gwengamp, NPA Gwengamp, Breizh O Stourm, PCF-Talbenn an Tu-kleiz.



KEMENNADURIOÙ ADALEK MIZ GOUERE ?

MACRON A GERZH WAR AR PARLAMANT HA KOD AL LABOUR

DALC'HOMP PENN !

Abalamour da betra e vijee dleet deomp leuskel amzer da vMacron ? Na c'hortozer ket pa vez kaoz eus distruj ar postoù-labour hag ar goproù, evit ar re vresk pe dilabour ,evit ar re hep lojeiz pe dibaper...Muioc'h evit biskoazh ez eomp « war vale » war_du an diskar sokial ! Petra zo kaoz e vije dleet deomp gortoz hep ober mann ebet ? Petra zo kaoz e vije ret lezel ar plas d'an tu-dehoù pellañ ?

Gwir eo eo bet dilennet Macron enep da Le Pen, met evit an dro gentañ gant e brogramen doa dastumet 8 528 585 mouezh war un hollad a 35 737 724 a dud bet o votiñ. Ar program ? Nebeutoc'h a parlamant,nebeutoc'h c'hoazh a bouez gant dezveg al labour, muioc'h a Uber hag a vreskted. Pres zo war Macron setu ma ra gant prosezadur ar c'hemennadurioù. Petra zo e scenario ar gemennadur gentañ ?

Pep tra zo prest evit miz Gouere. Petra zo e-barzh ?

- 1- Astenn ar brioriezh d'an emglevioù dre embregerezh . Lezenn El Khomri (diwar-benn al labour) a roe an aotre d'en ober evit hirder an amzer labour. An implij, ar goproù hag an aozioù labour a vo en emglevioù ivez.
- 2-Kendeuzet e vo ensavadurioù dileuriañ an implijidi (KE, DI, PYSAL)
- 3-An dic'haouioù e kenkaz e vezer ezfredet en un doare nann reizh a vo stanket d'ur serten live. Un taol fall eo evit lezvarn ar Prud'hommes, ur prof eo a-benn reiñ an tu d'an implijerien da skarzhañ prim al labourien.

Peseurt mod e vo graet gant al lezenn engwiriadur evit ren dre gemennadurioù ?

- 1-Ober vann da gaout un eskemm sokial gant ar sindikadoù
- 2-Ha goude se e c'hello ar gouarnamant embann ur gemennadur. Engwiriet e rank bezañ gant ar parlamant hervez mellad 38 ar vonreizh. Lakaet da reolennoù ez eo ar c'hemennadurioù a vo talvoudus kerkent a beurwiriekaet gant ar parlamant.

Petra zo kaoz e fell d'an talbenn sokial sevel ur stourm gant an holl,gant ar muiañ a dud posubl ? Abalamour da betra e rankfe ar pal se bezañ un doare da lakaat an holl sindikadoù da labourat asambles ? Pouezus meurbet eo ar gemennadur gentañ. Ma c'hell Macron ober al lezenn evel ma karo ez ay betek penn o tiskar ar gounidoù sokial bet tapet dre ar stourmoù sokial hag ar c'henskoazell. Hag e-keit se eo laouen tre ar MEDEF/EAEG. Galv diazez an talbenn sokial a oa e bal kenderc'hel gant ar stourm enep d'al lezenn labour ha d'ar waskerezh , ha setu amañ e-barzh ar vro e c'halvomp hiziv an deiz :

D'EN EM VODañ D'AL LUN 19 A VIZ EVEN DA 6E NOZ DIRAK TI-KÊR GWENGAMP.

Kinnig a reomp da aozañ ar stourm o klask lieskementiñ ar c'hengerc'hioù , an doareoù stourm, ar bodadegoù, ar manifestadegoù, hep ankouaat an emvodoù-meur en embregerezhioù ha er melestradurezhioù.Pres zo warnomp, dav eo en em aozañ en un doare lec'hel e pep lec'h ma c'heller sevel ur c'heñver-nerzh. Deus un tu all e faot deomp adlâret e nac'homp ar gwask direizh a zo bet hag a bad , setu ma c'houlennomp ma vo distaoliaet an 2000 den bennak bet barnet ha kondaonet evit o stourm enep al lezenn labour ha lezet da vont diouzhtu ar Roazhoniz zo toullbac'het c'hoazh.

Sinet gant UL CGT Gwengamp, Solidaires Gwengamp, CNT 22,France Insoumise Gwengamp, NPA Gwengamp, Breizh O Stourm, PCF-Talbenn an Tu-kleiz.